


ROLL AR SERVIJOÙ

Centre
de découverte
DU SON

KREIZENN
AR SON



KAWAN CAVAN (22)



Kreizenn ar son zo ur gevredigezh bet krouet e 1998. E Kawan emañ, ur gumun eus tiriad Kumuniezh Lannuon Treger e-barzh Aodoù-an-Arvor. Meret eo Kreizenn ar son a-stroll ha grataet eo gant an Deskadurezh-stad ha Yaouankiz ha Sportoù. Tapet he deus al label « Ya d'ar brezhoneg » hag e laka ar brezhoneg da vevañ dre hec'h abadennoù buheziñ kaset e brezhoneg hag ivez dre banellerezh divyezhek al lec'h.

Al lec'h-mañ, c'hwec'h devezh-arat ennañ, e-kreiz an natur, ur goudor LPO anezhañ, en deus perzhioù dibar a-fet kalite ar son. Kavout a raer amañ ur wenodenn-son bedagogel en un draoñienn goadek, liorz an divskouarn diwar-benn fiziologiezh ar skouarn hag ivez lojeiz a-espres evit degemer an dud.

Teknikourien ha buhezourien varrek, skiant-prenet gante, zo er skipailh. Kinnig a reont obererezhioù evit kizidikaat an dud ouzh ar selaou ha dizolioñ ekologiezh ar sonioù. Evit an holl eo an obererezhioù-se, meur a stumm gante : abadennoù buheziñ, atalieroù, standoù, stummadurioù ha staliadurioù-son (war-blas pe er frammoù). Ur bern traoù all en-dro d'ar sevenadur a vez aozet ivez gant ar gevredigezh, liammet gant ar c'horn-bro : atalieroù kan, festoù-noz ha festoù-deiz, sonadegoù, prezegenoù, abadennoù muzik...

TITOUROÙ // INFOS PRATIQUES


E Kreizenn ar son e tegemeromp tud a bep seurt, adalek ar vugale vihan betek an dud en oad : ar publik ledan, ar skolioù, ar frammoù Degemer Minored A-stroll (DMA), an annezioù herberc'hiañ evit an dud oadet dalc'het (AHDOD), ar C'homiteoù Embregerezhioù, an Oaledoù sokial... Diouzh ar c'hoant hag an ezhomm e kinnigomp obererezhioù, a c'hallomp sevel ganeoc'h !

Temoù an abadennoù buheziñ kinniget a c'hall bezañ cheñchet hag azasaet hervez ar raktres a vo ganeoc'h : abadennoù buheziñ, atalieroù, staliadurioù, krouidigezhioù-son ha kalz a standoù bevaet, baleadennoù, atalieroù ha staliadurioù-son a bep seurt a c'hall bezañ personelaet hervez temoù a bep seurt hag adstummet diouzh hoc'h ezhommoù.

Evit ar strolladoù e c'hall an obererezhioù bezañ graet e Kreizenn ar son adalek hanter miz Meurzh betek vakañsoù an Hollsent. Kinnig a reomp ivez abadennoù en diavaez al lec'h e-pad ar bloaz. Gwelloc'h eo dont e darempred ganeomp evit prientiñ anezhe.

Da zizoloñ ivez en trowardroioù : Traonienn an Arzoù e Kawan, Tro ar c'hleier, Kastell Tonkedeg, Chapeau l'escargot, baleadennoù war droad, war varc'h, war velo...





- Degemer
- Sal-vevaat
- Lec'h diskuizh
- Kabanenn selaou
- Diskouezva
- Taol biknikañ





KINNIGOÙ // PRESTATIONS

- Skolioù
- Ensavadurioù
- Darvoudoù - Publik ledan

E Kreizenn ar son...

Au Centre de découverte du son...

Gwenodenn ar sonioù

Adalek miz Ebrel betek miz Du, adalek 1e goude kreisteiz • gweladenn emren

Ur pennad bale leun a ijin en un draoñenn goadek, war-gaout taolioù-arnod-son souezhus ha fentus.

Diwallit : en ur c'hoad emañ Gwenodenn ar sonioù, displaen ha sav-diskenn tout, gwelloc'h eo chom hep dont gant ur bousestenn, memes tra evit an dud dalc'het en o c'herzhed, nemet hag e-barzh ur joeletenn e vefent.

Liorzh ar sonioù

En hañv, adalek 1e goude kreisteiz • gweladenn emren

It da ergerzhout ur jardin bras e stumm ur skouarn, el lec'h m'eo sonioù a vez lakaet da voutañ e penn pep alez, ha pa vefet el Lab'Skouarn e c'hallfet c'hoari gant hoc'h organ klevet-c'hwil !

Dihun d'ar selaou ● ● ●

En diavaez // Adalek miz Meurzh betek miz Du
>> Aliet adalek 3 bloaz

It d'ober ur weladenn digent ambrouget gant ur buhezour/vuhezourez. Penn da benn d'ur wenodenn kempennet a-espres, kemerit perzh e obererezhioù c'hoarius ha pedagogel diwar-benn mont en-dro ar son hag ar selaou.

Ar skouarn c'hlas ● ● ●

Er-maez // Adalek miz Even betek miz Here
>> Aliet adalek 10 vloaz

Eus ar skouarn d'an empenn : dizoloiñ fiziologiezh ar skouarn, c'hoari gant traoù naturel a ra sonioù, ha war ar memes tro kizidikaat ouzh ar pezh a c'hall bezañ dañjerus ha fall evit ar c'hleved.

...ha forzh pelec'h !

...et partout ailleurs !

Pennadoù kousk son ●

En diabarzh // E-pad ar bloaz
En diavaez // Adalek an amzer gaer



Setu kaset ar selaouerien e-bourzh un abadenn-son, amzer un hunvreadeg a-stroll. Graet eo pep tra, tro-dro, aze, evit ma vefe aezetoc'h d'an dud distegnañ hag en em laoskel da vont : ar selaouerien, gourvezet brav war gadorioù hir, a spluj en ur gloc'horenn-son e-pad 20 pe 30 munutenn.

Staliadurioù-son berrbad

En diavaez pe en diabarzh // E-pad ar bloaz ● ●

Staliadurioù krouet war patrom ar re a vez kavet a-hed Gwenodenn ar sonioù hag el Lab'Skouarn e Kreizenn ar son, evit komz eus ar sonioù en ur mod pedagogel, dudioz hag etreoberiat.

Krouidigezh-son ● ● ●

E-pad ar bloaz

Diwar ar pezh zo ganeomp en hon bank sonioù peotramant enrolladennoù graet a-espres e reomp krouidigezhioù-son e c'hall bezañ meur a stumm dezhe, hervez ar raktres zo ganeoc'h : klevedva, kelaouadenn, krouidigezh elektroakoustik.

Bitrak'son ● ● ●

En diavaez pe en diabarzh // E-pad ar bloaz
>> Aliet adalek 5 bloaz

Dibab hag adkelc'hiañ evit ober sonioù ha sonerezh. E-kerzh un abadenn gouestlet d'ar bitrakiñ ha d'al luderezh arnod e implijomp kozh danvezioù adtapet evit sevel traoù son dibar hag e teskomp ober gante.

Organologiezh ●●●

En diavaez pe en diabarzh // E-pad ar bloaz

Eus ar son d'ar sonerezh, eus an draezenn d'ar benveg. Kemerit perzh en un toullad taolioù-arnod dibar ma lako ar buhezour /vuhezourez traoù ar pemdez da soniñ, diwar kinnigoù ar publik. Un abadenn-arvest evit kompren penaos ec'h a ar binvioù muzik en-dro ha deskiñ renkañ anezhe pep hini en e rummad.

Sinema an divskouarn ●●

En diabarzh // E-pad ar bloaz

En diavaez // Adalek an amzer gaer

Setu kaset ar selaouerien e-bourzh un abadenn selaou heuliet gant ur pennad eskemm gant ur prezegenner/brezegenner (produerien ar sonioù skignet, tud liammet gant an temoù zo kaoz anezhe...). Er program-madur e lakaer en a-raok krouidigezhioù ha taolioù-arnod war ar son : teulsonioù radio, tapadurioù aodio-naturelour, pezhioù faltazi ha barzhoniezh son, pezhioù elektroakoustek, kontadennoù...

Achapadenn e bedoù-son ●●●

En diavaez // Adalek an amzer gaer

>> 25 den d'ar muiañ

>> Aliet adalek 9 bloaz

Soniñ a ra ar bed en ur mod disheñvel pa vezer prest da selaou. En hon buhez pemdez e vez sonioù, endroioù elektroakoustek, aergelc'hioù ha harzoù diwelus o tiflukañ hag o steuziañ kuit a bep eil hep na vefe taolet pled oute. Gant ar storlokerezh laouen-se e sav e pep hini klevedvaou dezhañ e-unan, rannet, gwir ha faltaziet. Amzer ur valeadenn e ambrougomp ac'hanoc'h evit doñvaat asambles ar bedoù-son-se.

Gwasked selaou heloc'h ●

En diavaez pe en diabarzh // E-pad ar bloaz

>> Taolit pled : da vezañ luget, ezhomm zo tredan ekichen

Ur gwasked a c'haller cheñch plas dezhañ, evit azezañ ha selaou danvez a bep seurt : teulsonioù, sonioù an natur ha pezhioù all da selaou.

Sonioù ar maezioù ●●●

En diavaez pe en diabarzh // E-pad ar bloaz

>> Ur stumm all : sonioù an aod

>> Aliet adalek 3 bloaz

Amzer ur valeadenn, kemeromp amzer da guntuilh ha da zastum plant ha maenadoù a bep seurt e-barzh an natur. Un obererezh evit deskiñ sevel ha dornata traozoù son o tont eus an natur.

Baleadenn son o selaou an evned ●●●



En diavaez // Adalek miz Genver betek Miz Even

>> 15 den d'ar muiañ

>> Aliet adalek 8 vloaz

Laoskit kan an evned da heñchañ ac'hanoc'h, ar re en em gaver gante e pleg un hent don, en ur jardin, war parking ur vilajenn, war bord ur wazh... Tokarnoù ganeoc'h war o tivskouarn da greñvaat ar sonioù, soubet e vefet e-barzh da vat !



Skolioù

Ensavadurioù

Daryvoudoù - Publik ledan

Evit piv ? Public	Kinnigoù Prestations	Oad Âge	Niver Jauge
✓ ✓ ✓	Dihun d'ar selaou	Adalek 3 bloaz	30 d'ar muiañ
✓ ✓ ✓	Ar skouarn c'hlas	Adalek 10 vloaz	30 d'ar muiañ
✓ ✓ ✓	Bitrak'son	Adalek 5 bloaz	30 d'ar muiañ
✓ ✓ ✓	Sonioù ar maezioù	Adalek 3 bloaz	30 d'ar muiañ
✓ ✓ ✓	Organologiezh	Adalek 3 bloaz	30 d'ar muiañ
✓ ✓ ✓	Baleadenn son o selaou an evned	Adalek 8 vloaz	15 d'ar muiañ
✓ ✓ ✓	Achapadenn e bedoù-son	Adalek 9 bloaz	25 d'ar muiañ
✓ ✓	Sinema an divskouarn		
✓	Pennadoù kousk son		
✓ ✓	Krouidigezh-son		
✓ ✓	Staliadurioù-son berrbad		
✓	Gwasked selaou heloc'h		



Padelezh Durée	Lec'hioù Lieux	Prizioù Tarifs	Prantadoù Périodes
2e	CDSon : en diavaez	170 €	Adalek miz Meurzh betek miz Du
2e	CDSon : en diavaez	170 €	Adalek miz Even betek miz Here
2e	Pep lec'h : en diavaez pe en diabarzh	170 €	E-pad ar bloaz
2e	Pep lec'h : en diavaez pe en diabarzh	170 €	E-pad ar bloaz
1e30	Pep lec'h : en diavaez pe en diabarzh	170 €	E-pad ar bloaz
2e	Pep lec'h : en diavaez	170 €	Adalek miz Genver betek Miz Even
2e	Pep lec'h : en diavaez	170 €	Nevez amzer, hañv, diskar amzer
	Pep lec'h : en diavaez pe en diabarzh	Rakpriz diwar goulenn	E-pad ar bloaz
	Pep lec'h : en diavaez pe en diabarzh	Rakpriz diwar goulenn	E-pad ar bloaz
		Rakpriz diwar goulenn	E-pad ar bloaz
	Pep lec'h : en diavaez pe en diabarzh	Rakpriz diwar goulenn	E-pad ar bloaz
	Pep lec'h : en diavaez pe en diabarzh	Rakpriz diwar goulenn	E-pad ar bloaz



PRIZIOÙ // TARIFS

HINIENNOÙ // PARTICULIERS

Gweladenn dieub ar wenodenn – Emren, hep buhezour/buhezourez :

Bugale etre 3 bloaz ha 14 vloaz	7€
Tud vras adalek 15 vloaz	9€
Priz digresket	5€

STROLLADOÙ (estreget ar skolioù) // GROUDES (hors scolaires)

Gweladenn dieub ar wenodenn – Emren, hep buhezour/buhezourez :
Ma vez miret en a-raok, adalek 8 den (hep kontañ an ambrougerien)

Bugale etre 3 bloaz ha 14 vloaz	5€
Tud vras adalek 15 vloaz	7€
Ambrouger	Priz digresket

Hep bezañ miret en a-raok, adalek 8 den (adalek ambrouger)

Bugale etre 3 bloaz ha 14 vloaz	7€
Tud vras adalek 15 vloaz	9€
Ambrouger	9€

ABADENNOÙ // ANIMATIONS

Abadenn e kreizenn ar son	170€
Abadenn dilec'hiet	Adalek 170€

TRAOÙ ALL // AUTRES

Staliadur / Krouidigezh	Goulenn ur rakpriz
Frejoù anaouderezh	Goulenn ur rakpriz
Frejoù hent	Goulenn ur rakpriz
Skodenn vloaz evit bezañ ezel	10€

Goulennit ho rakpriz personelaet evit mann !



GPS

48°39'50.10"N, 3°21'59.36"W

KEROUSPIC
22140 KAWAN

www.cdson.org
contact@cdson.org

02 96 54 61 99

